

8N3-1-015  
**ORDINAL AN OVERENN**

---

E-traon an aoter

EN ANO AN TAD HAG AR MAB  
HAG AR SPERED SANTEL. AMEN.

Tostaad a rin davéd aoter Doue,

- An Doue 'zo levenez va yaouankiz.

Or skoazell a zo en Aotrou Doue,

- E-neus grêt an nenv hag an douar.

Me 'goves ouz Doue... (gand ar beleg).

- Plijet gant Doue oll-halloudeg kaoud trugarez  
ouzoh, pardoni deoh ho pehejou ha kas ahanoh d'ar  
vuez peurbaduz.

Amen.

- Me 'goves ouz Doue (1) oll-halloudeg,

ouz ar Werhez gloriuz Vari,

ouz an aotrou sant Mikael arhêl,

ouz an aotrou sant Yann Vadezour,

ouz an ebestel sant Pêr ha sant Paol,

ouz an oll Zent hag ouzoh, va zad,

am eus pehet braz dre zonzj, dre gomz ha dre ober :

dre va faot, dre va faot, dre va brasa faot.

Rag-se e pedan ar Werhez gloriuz Vari,

an aotrou sant Mikael arhêl,

an aotrou sant Yann Vadezour,

an ebestel sant Pêr ha sant Paol,

an oll Zent ha c'hwi, va zad,

da bedi Doue evidon.

Plijet gand Doue... (evel uheloh).

- Amen.

Pardon hag absolvenn euz or pehejou bezet roet deom gand Doue oll-halloudeg ha trugarezuz.

- Amen.

Va Doue, distroit da rei deom buez,

- Hag ennoh ho pobl a gavo levezeg.

Diskouezit deom, Aotrou, ho madelez,

- Ha roit deom ho silvidigez.

Aotrou Doue, selaouit va fedenn,

- Ra zavo davedoh va galvadenn.

An Aotrou Doue ganeoh.

- Ha gand ho spered.

### Kyrie

Aotrou Doue, ho pet truez. (3 gwech).

Aotrou Krist, ho pet truez. (3 gwech).

Aotrou Doue, ho pet truez. (3 gwech).

### Gloria

Gloar da Zoue e barr an nenvou,

Ha peoh war an douar d'an dud a blij dezan.

Bezit meulet. Bezit trugarekeet. Bezit adoret.

Bezit enoret. Bezit benniget evid ho kloar dispar.

Aotrou Doue, Roue an nenv, Doue an Tad oll-halloudeg.

Aotrou, Mab unganet, Salver Jezuz.

Aotrou ha Doue, Oan Doue, Mab an Tad.

C'hwi hag a zilam pehed ar béd, ho pet truez ouzom.

C'hwi hag a zilam pehed ar béd, degemerit galv or pedenn.

C'hwi azezet en tu dehou d'an Tad, ho pet truez ouzom.

Rag c'hwi hebkén a zo santel.

C'hwi hebkén eo an Aotrou.

C'hwi hebkén eo an Uhel-meurbéd, Salver Jezuz,

Gand ar Spered Santel e gloar Doue an Tad. Amen.

### Orezon kempedenn

An Aotrou Doue ganeoh.

- Ha gand ho spered.

Pedom...

Ar gempedenn a vez echuet evel-henn :

Dre Or Zalver Jezuz Krist ho Mab hag on Aotrou, a vev hag a ren, Doue ganeoh ha gand ar Spered Glan a oll viskoaz ha da virviken.

pe :

C'hwi a vev hag a ren Doue gand an Tad ha gand ar Spered Glan a oll viskoaz ha da virviken.

pe :

En a vev hag a ren Doue ganeoh ha gand ar Spered Glan a oll viskoaz ha da virviken.

- Amen.

Evid an Abostol, al lenner a grog evel-henn, da skouer :

Lennadenn euz lizer an abostol sant Paol da gristenien...

Evid an Aviel, an avieler pe ar beleg overenner :  
An Aotrou Doue ganeoh.

- **Ha gand ho spered.**

Pennad euz an Aviel santel hervez sant...

- **Gloar deoh-hwi, Aotrou Krist.**

### Credo

Me 'gred en eun Doue hebkén.

An Tad oll-halloudeg, krouer an nenv hag an douar,  
kement a weler ha kement na weler ket.

Hag en eun Aotrou hebkén, Jezuz Krist, Mab unganet  
da Zoue.

Euz an Tad eo ganet, araog an oll gantvejou.

Doue euz Doue, sklerijenn euz sklerijenn, Doue  
gwirion euz Doue gwirion.

Ganet, ha n'eo ket grêt, kennatur gand an Tad,  
ha drezan eo bet grêt peb tra.

Evidom-ni an dud hag evid or zilvidigez, eo bet dis-  
kennet euz an nenv.

Ha korv e-neus kemeret, dre nerz ar Spered Santel,  
euz ar Werhez Vari, ha dén eo deuet da veza.

Evidom ivez staget ouz ar groaz, e-neus gouzanvet  
dindan Pons Pilat, hag er béz eo bet laket.

D'an trede deiz eo savet a varo da veo, hervez ar  
Skritur Zakr.

Pignet d'an nenv, eman azezet en tu dehou d'an Tad.

Hag adarre e teuo gand gloar da varn ar re veo  
hag ar re varo, ha ne vo fin ebéd d'e rouantelez.

Me 'gred er Spered Santel, a zo Doue hag a ro buez,  
a zeu euz an Tad hag euz ar Mab.

Par d'an Tad ha d'ar Mab eo adoret hag enoret,  
ha komzet e-neus dre ar Brofeted.

Me 'gred en Iliz, a zo unan, santel, katolik hag  
abostoleg.

Anzav a ran ez eus eur vadeziant hebkén, evid pardon  
ar pehejou.

Ha gortoz a ran adsav ar re varo da veo,  
Ha buez ar béd da zond. Amen.

### Ar Bedenn zul

Gand ar beleg e vez digoret ha klozet ar bedenn-man.  
An oll a respont da beb goulenn kinniget gantan — pe  
gand eul lenner — evelhenn :

... Pedom a greiz kalon.

- Doue madelezuz, selaouit or pedenn.

pe :

- Aotrou Doue madelezuz, selaouit or pedenn.

### Prefas

An Aotrou Doue ganeoh.

- **Ha gand ho spered.**

Ho kalon d'an uhel.

- **Troet eo warzu Doue.**

Lavarom bennoz da Zoue on Aotrou.

- **Just ha santel eo.**

## Sanctus

Santel, santel, santel,  
an Aotrou Doue, Mestr ar béd.

Leun eo gand ho kloar an nenv hag an douar.

Hozanna e barr an nenvou.

Benniget an hini a zeu en ano Doue.

Hozanna e barr an nenvou.

## Meuleudi da gloza Kanon an Overenn

Per ipsum, et cum ipso, (Dre Or Zalver, ha gantan,  
et in ipso est tibi Deo hag ennan eo deoh Doue  
Patri omnipotenti, in an Tad oll-halloudeg,  
unitate Spiritus Sancti, a-unan gand ar Spered  
omnis honor et gloria Glan, peb enor ha peb  
per omnia saecula gloar a oll viskoaz ha da  
saeculorum. virviken.)

- Amen.

## Pater

Pedom. Kenteliet gand gourhemenn Or Zalver, ha  
desket ma 'z om bet gantan da bedi, e kredom  
lavared :

On Tad hag a zo en nenv,  
hoh ano bezet santellét,  
ho rouantelez deuet deom,

ho polontez bezet grêt war an douar evel en nenv.

Roit deom hirio or bara pemdezieg,  
pardonit deom on ofansou,  
evel ma pardonom d'ar re o deus on ofanset,  
ha n'on lezit ket da goueza en tentation,  
med on dillvrit diouz an droug.

On dizammit, Aotrou Doue, diouz peb droug  
tremenet, a-vreman ha da zond. Ha dre bedennou ar  
Werhez gloriuz Vari, Mamm da Zoue, re an ebestel  
venniget Pêr ha Paol, hag Andrev, ha re an oll Zent,  
plijet ganeoh rei deom ar peoh en on amzer, ma vezim  
bepréd, dre ho madelez, distag diouz ar pehed ha  
diwallet diouz peb trubuilh. Dre Or Zalver Jezuz  
Krist ho Mab hag on Aotrou, a vev hag a ren Doue  
ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz ha da  
virviken.

- Amen.

Peoh Or Zalver ra vo bepréd ganeoh.

- Ha gand ho spered.

## Agnus Dei

Oan Doue, a zilam pehed ar béd,  
ho pet truez ouzom. ( pe : roit diskuiz d'an anaon).

Oan Doue, a zilam pehed ar béd,  
ho pet truez ouzom. ( pe : roit diskuiz d'an anaon).

Oan Doue, a zilam pehed ar béd,  
roit deom ho peoh.  
( pe : roit diskuiz d'an anaon da virviken).

## Da gomunia

Setu Oan Doue, an hini a zilam pehed ar béd.  
- Va Doue, n'on ket din e teufeh beteg ennon,  
med lavarit eur gêr hebkén, hag e vin paret.

Korv Or Zalver. - Amen.

## Da gloza an Overenn

It e peoh Or Zalver,  
pe awechou :

Meuleudi d'Or-Zalver.

- Bennoz da Zoue.

En overennou evid an Anaon :

Peoh ha diskuiz d'an Anaon.

- Amen.

Doze oll-halloudeg d'ho penniga, an Tad, ar Mab  
hag ar Spered Santel.

- Amen.



(1) Ar bedenn-man a zo anavezet eun tammig dis-  
henvel e lehiou 'zo. Tud peb leh kenetrezo a heulio o  
doare kustum.

Imprimatur, 5 Aprilis 1965

† V. Favé

Eskob ekoazeller Kemper

Peb gwir miret striz

Mouñerez Bro-Gerne, Kemper